

GWERZ NEVE

WAR BUEZ AN AOTROU DOM MIKEL NOBLETZ

Ton : *Santez Mari Mamm Doue*

63

Breman ez euz tri c'hant vloaz,
Da zouar Breiz-Izel
An ifern a ziskleriaz
Ar spontusa brezel ;
Bro ar zent, koulz lavaret,
Oa neuze da Zatan,
Ar feiz hanter-ziskaret
Oa war he zremenvan.

Doue, tad karantezuz,
Ne c'houlen ket hor c'holl ;
Dre varo e vab Jezuz
En deuz hor prenet holl ;
Doue euz ar Vretouned
A gemeraz truez,
D'o c'helen en deuz roet
D'ezo Mikel Nobletz.

Ganet eo e Plougerne
E maner Kerodern ;
E dad a c'halvet Herve,
E vamm Seza Lesvern ;
O-daou oant tud a lignez,
Euz kosa noblans Breiz,
Daou bried leun a furnez,
Bretoned stard er feiz.

Iaouankik-flamm ar bugel
A gavet aliez
Daoulinet en eur chapel
O pedi ar Werc'hez ;
Eun Itron gaer, emez-an,
En e zorn a groge,
Hag a vlenie anezan
Da di 'n Aotrou Doue.

Dindan skoazell mamm Doue
Mikel a gresk bepred ;
^{Hag an} An diaoul war e ene
Ne gavo krog ebet.
'Vit trec'hi ar gwall-ioulou,
'Kreiz an erc'h e c'hourvez,
En noaz e ruill a-wechou
War ar spern hag an drez.

Biskoaz n'eo bet touellet
Gand'enor na gant brud :
En o raok en deuz tec'het
Daoust da c'hourdrouz e dud.
Laouen e oa o redek,
Dre an erc'h hag ar skorn,
War ar meziou da brezek,
E glou'hik en e zorn.

D'ar vugaligou vihan
E tesk ar c'hatekiz ;
Ar re vraz 'deu o-unan
D'e zelaou o tiviz,
E peb leac'h leou-douet
Skouer-fall ha gwall-dechou
'Zo gant-an dic'hriziennet
Dre nerz e daolennou.

E peb korn euz Breiz-Izel
E tregernaz e vouez :
Sizun, Eusa, Dom Mikel,
Ho klevaz aliez ;
Douarnenez, Konk-Leon,
Lok-Maze Pen-ar-Bed,

Na pebez joa d'ho kalon
Oa o c'helen bepred.

Hirio er misionou
E c'hellomp klevet c'hoaz
Displega an taolennou
Gwech-all a zisplegaz.
E brezonek e skrive
Kanaouennou santel,
A-greiz kalon o c'hane
Bugale Breiz-Izel.

Mikel en doe trubuilhou
E-pad e holl vuez ;
Ar boan, an dismegansou
A rea e levenez.

Dre hent garo an anken,
Ma 'z eomp d'ar baradoz,
Kaeroc'h 'vo ar gurunen
A zo ouz hor gortoz.

Dre zaouarn e zervicher
Doue ra burzudou,
Meur a weach, a leverer,
E pare klenvejou ;
An dud varo sebelliet
A zav dre e beden,
Dirak ar bobl sebezet
O gwelaz o tremen.

Al labour en doa brevet
Korf hor misioner ;
Da gaout e vroiz karet
E c'halv an tad Maner.
Lavaret a ra neuze :
Kenavo Breiz-Izel,
Ra zeuio breman Doue
Pa garo d'am gervel !

Kerik Konk, e relegou
Zo chomet en da greiz ;
Bez sonj euz e genteliou,
Dalc'h ato mad d'ar feiz.
An Iliz, hor mam zantel
A studi e vuez :
Fizianz hon deuz, Breiz-Izel
A po eur zant nevez.